

HER

Eur wech hebkenam euz gueleit Jaffrennou, hag e oen sebezet o welet pegen iaouank ez eo c'hoaz, hag hen dija ken gouziek var ar brezounek.

D'he oad, ann dri c'hart euz ar botred iaouank, nevez kuitteat gant-ho ar skollach, ho deuz mez o komz brezounek, a ra fae var iez ho zad hag ho mamm.

Jaffrennou, abarz zoken beza lavaret kenavo d'ar skol, ne gave ket aoualc'h komz evel he dud ; skriva a rea, ouspenn, ha skriva a ra bemdez ar brezounek, e kazetennou he vro.

Guellloc'h a ra c'hoaz : sevel a ra gwerziou nevez, gwerziou honest, ha koantik ar memes tra.

Dastumet en deuz eun hanter kant bennak euz ar gwerziou-ze enn eul levrik, nevez moulet, hag hanvet mad gant-han **An Hirvoudou.**

Hirvoudou tout, ia, pe kazi, eo gwerziou nevez Jaffrennou.

— Eur galoun goall-enkrezet eo eta neuze hini ann den iaouank-ze ?

N'oun dare ; hirvoudi a ra, da viana, dalc'h mad ; hirvoudi a ra o welet poaniou ha trubuilhou ar bed-ma ; hirvoudi a ra muioc'h c'hoaz o welet pegen disprijet eo ar c'hiziou koz, ha dreist-holl ar brezounek, eur iez ken kaer.

Goulskoude, gant furchal aoualc'h, e kaver el levr eur werzik joauz bennak, evel hou-ma :

SON AR JISTR : *par Jaffrennou*

I

Beza meuz evet eur poudad,
Tankerru ! Hennez a oa mad !
Koulz ha gwin-ardan ha gwin gwen,
Hennez a zigas nerz d'ar penn !
Tankerru ! Hennez a oa mad,
Me mize evet dek poudad !

II

Eur poudad jistr, o gwella tra
Vid freskaat an ene dua !
Eur poudad jistr zo eul louzou
Hag a laka joa er c'halonou.
Tankerru ! Hennez a oa mad,
Me mize evet dek poudad !

III

Jistr ar Breizad zo jistr bevus
Hennez a lak an dud nerzus !
Jistr ar Breizad eo ar gwella
C'hallfer da gavout er bed-ma,
Tankerru ! Hennez a oa mad,
Me mize evet dek poudad !

IV

Pa zeuan da di eur Bretoun
Dirag ar jistr 'trid ma c'haloun,
Gand eun nebeudik miniouned,
Eva jistr a zo permetet !
Tankerru ! Hennez a oa mad,
Me mize evet dek poudad !

V

Hallo ! Paotred ar festou kaer,
Bezomp holl lawen ha seder !
Ar jistr a lak ar sperejou
Da nijal tresek an nevou !...
Tankerru ! Hennez a oa mad,
Me mize evet dek poudad !

An Hirvoudou a vez gwerzet eiz real ; her c'haout a reer da brena e ti ar brasa levrerien euz hor bro.